

karta europat an titouriñ evit ar yaouankiz

Degemeret e Bratislava (Republik Slovakia) d'an 19 a viz Du 2004 gant 15vet Emvod-meur an Ajañs europat evit titouriñ ha kuzuliañ ar yaouankiz (ERYICA).

Raklavar

En ur bed kemplezh hag en un Europa kreñvaet ma vez roet kalz daeoù ha troioù, e teu da vezañ pouezusoc'h pouezus d'an Europiz yaouank bezañ titouret ha gallout dielfennañ hag implijout an titouroù-se. Al labour titouriñ evit ar yaouankiz a c'hall sikour anezho da gas o c'hoantoù da benn vat ha broudañ anezho da vezañ lodek hag oberiant er gevredigezh dre- vras. Al labour titouriñ evit ar yaouankiz a rank bezañ graet en doare da ledanaat an dibab kinniget d'ar re yaouank ha da greskiñ o emrenerezh hag o galloud soñjal hag ober traoù drezo ounan.

Doujañ an demokratelezh, gwirioù mab-den hag ar frankizoù diazez, a empleg e rank ar re yaouank kaout gwir da gaout titouroù klok, objektivel, komprenus ha fizius evit o holl c'houlennoù hag ezhommoù. Ar gwir da vezañ titouret zo bet anavezet gant Disklêriadur Hollvedel Gwirioù Mab-den, gant ar C'hendivizad evit Gwirioù ar Vugale, gant ar C'hendivizad Europat evit Gwareziñ Gwirioù Mab-den ha gant an Erbedadenn niv. R (90) 7 eus Kuzul Europa a-zivout an titouroù hag ar c'huzulioù da rein d'ar re yaouank en Europa. Ar gwir-se zo ivez diazez an oberoù titouriñ evit ar yaouankiz a bled Unaniezh Europa ganto.

Digoradur

Al labour titouriñ a-vras evit ar yaouankiz a denn d'an holl zanvezioù a zedenn ar re yaouank hag a sell ouzh a bep seurt oberoù : titouriñ, kuzuliañ hag aliañ, heñchañ, sikour, harpañ, ambroug, "coaching" ha stummañ, labourat gant rouedadoù hag ivez adkas war-du servijoù arbennikaet. An oberoù-se a c'hall bezañ kinniget gant kreizennoù titouriñ evit ar yaouankiz, gant servijoù titouriñ evit ar yaouankiz e diabarzh frammoù all, dre ar mediaoù elektronek pe dre zoareoù media all. Pennaennoù ar Garta-mañ zo da lakaat e pleustr evit pep stumm labour titouriñ evit ar yaouankiz. Mont a reont d'ober ur renabl eus an traoù-skouer zo d'ober da nebeutañ hag eus an diarbennoù kalite a ranker lakaat war- sav e pep bro, hervez un doare hollek, kempoell ha kenurzhiat eus al labour titouriñ evit ar yaouankiz, al labour-mañ o vezañ un tamm eus ar politikerezh evit ar yaouankiz.

Pennaennoù

Ar pennaennoù-mañ a ya d'ober pennlinennoù al labour titouriñ a-vras evit ar yaouankiz a dalvez da warantiñ ar gwir zo gant ar re yaouank da vezañ titouret.

1. Digor eo ar c'hreizennoù hag ar servijoù titouriñ evit ar yaouankiz da gement den yaouank zo.
2. Diouzh ar gwellañ e ra ar c'hreizennoù hag ar servijoù titouriñ evit ar yaouankiz evit gwarantiñ ma vo roet an tu d'an holl re yaouank da vezañ titouret, ne vern petra eo o saviad, o orin, o reizh, o relijion pe o rummad sokial. Aketusoc'h e ranker bezañ ouzh ar re dibourvez hag ouzh an dud yaouank o deus ezhommoù ispisial.
3. Ar c'hreizennoù hag ar servijoù titouriñ evit ar yaouankiz a rank bezañ lec'hioù ma c'haller mont aes ha hep goulenn emgav. Rankout a reont sachañ evezh ar re yaouank ha bezañ degemerus. An eurioù digeriñ a rank klotañ gant ezhommoù ar re yaouank.
4. Diouzh goulennoù ar re yaouank e vez an titouroù pourchaset, hag ivez diouzh an ezhommoù stummañ raktreset. Plediñ a reont gant an holl zanvezioù a c'hall ar re yaouankbezañ dedennet ganto hag emdreiñ a reont ingal a-benn plediñ gant re nevez.
5. Pep implijer yaouank zo doujet evel un hinienn dibar ha personelaet eo ar respont a vez roet da bep hini. Kementmañ a rank bezañ graet e doare da reiñ an tu d'an holl implijerien da greñvaat o galloud soñjal hag ober traoù drezo o-unan, da vezañ emren ha da gas war-raok o galloud dielfennañ hag ober o mad eus an titouroù.
6. Digoust eo ar servijoù titouriñ evit ar yaouankiz.
7. Pourchaset e vez an titouroù en ur zoujañ buhez prevez an implijerien ha gwir o deus da chom hep disklêriañ piv int.
8. Roet e vez an titouroù gant tud a vicher, stummet evit se.
9. Klok, hizivaet, resis, pleustrek, kinniget brav hag aes da implijout eo an titouroù pourchaset.
10. Diouzh ar gwellañ e reer evit gwarantiñ objektivelezh an titouroù pourchaset, dre implijout mammennoù liesseurt ha dre wiriañ anezho.
11. An titouroù pourchaset a rank bezañ distag diouzh pep levezon relijiel, politikel, ideologel pe kenwerzhel.
12. Ar c'hreizennoù hag ar servijoù titouriñ evit ar yaouankiz a rank klask sachañ evezh ar muiañ ar gwellañ a dud yaouank, dre implijout doareoù efedus hag a zere ouzh rummadoù tud hag ezhommoù disheñvel. Evit se e rankont bezañ barrek da grouiñ ha kaout ijin evit dibab ostrategiezh, o hentennoù hag o binvioù.
13. Ar re yaouank a rank kaout tro da gemer perzh e tennadoù diseurt al labour titouriñ evit ar yaouankiz, en un doare azas ha war kement tachenn zo : lec'hel, rannvroel, broadel pe etrebroadel. E-touez labourioù all e c'haller lakaat anezho da reiñ dorn evit diskoachañ ezhommoù, evit prientiñ ha skignañ an titouroù, evit merañ ha priziañ servijoù ha raktresoù titouriñ, hag ivez evit kemer perzh en oberoù a empleg o c'henseurted.
14. Ar servijoù hag ar c'hreizennoù titouriñ evit ar reyaouank a rank kenlabourat gant servijoù ha frammoù yaouankiz all, dreist-holl gant ar re zo en o c'humun, halabourat gant urrouedad hanterourien hag aozadurioù all ara war-dro ar re yaouank.
15. Rankout a ra ar servijoù hag ar c'hreizennoù titouriñ evit ar yaouankiz skoazellañ ar re yaouank da dapout titouroù dre an teknologiezhioù kelaouiñ ha kehentiñ nevez, ha da wellaat o barregezhioù da ober ganto.
16. Ar mammennoù arc'hant evit al labour da gelaouiñ aryaouankiz ne zleont ket mirout ouzh ar servijoù hag arc'hreizennoù titouriñ evit ar yaouankiz da lakaat e pleustrholl bennaennoù ar Garta-mañ.

© ERYICA – 2004